

Dek ha Nedeleg



Pegoulz e vo Nedeleg?

A c'houlenn bugale ar bed.

Pegoulz e vo Nedeleg?

Ma n'ouzez ket, kont' ta betek dek.

Ma ne gouezh ket an erc'h,

Kont betek c'hwec'h.

Ma ne gan ket al loar,

Kont betek pevar.

Pegoulz e vo Nedeleg?

A c'houlenn bugale ar bed.

Pegoulz e vo Nedeleg?

Ma n'ouzez ket, kont' ta betek dek.

Piv a zeuio en ti?

Kont betek tri.

Hep kaout an alc'houez,

Kont betek seizh.

Pegoulz e vo Nedeleg?

A c'houlenn bugale ar bed.

Pegoulz e vo Nedeleg?

Ma n'ouzez ket, kont' ta betek dek.

Ar sapin 'zo ken brav,

Kont betek nav.

Met n'eus ket a brofoù,

Kont betek daou.



Mona Jaouen